

Krugell Karnak

A-zevri-bev edor oc'h echuiñ sevel bez an ozac'h-meur war menez Karnak. A-bell eus tu ar c'hreisteiz e veze gwelet ar mor o lintrañ dindan bannoù an heol. Ur foz a oa bet toullet en douar, hirder daou gorf den dezhi ha ken ledan all pe dost. Mein-sav a oa bet lakaet en-dro d'an toull, panevet en ur c'horn. Korf ozac'h-meur meuriad Karnak a vefe lakaet er bez-se dizale, war e dremenvan edo an den kozh ur pennad e oa. Daou bezh maen hir ha ledan a yafe d'ober toenn ar bez. Ur grugell hir, ledan hag uhel a c'holofe ar bez penn-da-benn. Ne chome nemet an talbenn araog anezhi da echuiñ. Ur pikol savadur, uhelder pemp den en o sav, a vefe anezhi. A-bell bras e vefe gwelet.

Endra ma oa daou gizeller o renkañ ar vein-sav e oa ur mor a labourerien o sevel ar grugell. Tud eus ar vro hag un toullad sklaved, diwallet gant gwarded armoù ganto. Diouzh ur vengleuz nepell

ac'hano e veze tennet ar vein, hag ar pri eus ur stêr e-kichen. Gant kirri bihan stlejet gant ar sklaved e vezent kaset betek ar grugell ; pe e paneroù ha manikinoù gwial sammet war o chouk. Iset e veze al labourerien gant ar warded, skourjezet ganto ha bazhataet pa gouezhent dindan o bec'hioù pounner. En em gavet gant ar grugell e veze renket ar vein hag ar pri a wiskadoù tev, a-bep-eil, dindan urzhioù un tisavour. Bep an amzer e teue mab an ozac'h-meur, savet war e varc'h, d'ober ur gwel d'al labourioù. Reiñ kuzulioù d'ar gizellerien ha d'an tisavour. Ha bountañ war an darbarerien evit o lakaat da labourat buanoc'h ha founnusoc'h. Un den yaouank, bras ha kreñv e oa anezhañ. Un tok arem war e benn, ur roched eus an hevelep danvez war e gorf, kleze ha gougleze gantañ. Ruilhennoù kouevr a oa en-dro d'e c'houzoug ha d'e zivrec'h. Un den yud ha faeüs. Anat e oa edo o c'hedal e dad da vervel evit bezañ lakaet en e lec'h e penn ar meuriad. Gant dilhajoù mezer e oa gwisket tud ar vro. Gant krec'hin loened ar sklaved. A bep seurt liv e oa ar merc'hed ha paotred sklav-se, teñval pe damdeñval ar pep brasañ anezho.

Amir a oa unan diouto. Ur paotr yaouank moan ha bras, mistr e zremm, teñval e zaoulagad, blev du rodellet dezhañ. Skrapet e oa bet gant gwarded ar meuriad-mañ en ur vro bell, du-hont er c'hreisteiz, meur a loariad e oa. Glac'har ha kounnar a oa en e selloù. Bezañ divroet en desped dezhañ, ha gwelet e

genseurtes boureviet didruez gant mistri digernez. Meur a hini anezho en doa bet gwelet o vervel dindan an taolioù bazh ; lazhet dre ma ne oant ket gouest ken da labourat. Meur a wech e oa bet aet Amir war sikour hini pe hini anezho bet kouezhet ; harpañ anezho da sevel en-dro ha da genderc'hel gant o bec'h. Meur a dro e oa bet kastizet gant mab an ozac'h-meur. Dre ma oa kreñv ha mat da labourat e oa bet dalc'het war ar chanter, anez e vije bet graet e stal dezhañ pell a oa.

Amir ha Naïm

A-raok ma serras an noz e voe lakaet ar sklaved da chom a-sav gant o labour er grugell. D'ar gêr e oa aet tud ar vro, ur pennad e oa. Staget e voe ar baotred kenetrezo gant ereoù kreñv, hualet dezho o zreid. En e sav war ar grugell e sellas Amir etrezek ar c'hornôg, el lec'h ma 'z ae an heol da guzh. Ruz e oa an oabl, glas-teñval ar mor, an inizi hag ar reier o tuañ war-c'horre. Ur vro gaer, a-dra-sur, hogen pebezh buhez spontus e vezent lakaet da ren enni. Pleget o doa an darn vrasañ eus ar sklaved d'o flanedenn. Chom suj betek ar marv hag a zeue abred peurliesañ. Amir avat ne felle ket dezhañ sentiñ d'an tonkadur-se. Ne felle ket dezhañ disoñjal c'hwezh vat e vro na blaz saourus ar frankiz. Kousto pe gousto e tec'hfe kuit evit adkavout e venezioù Adrar. P'edo an tropellad sklaved o kuitaat ar grugell, kaset evel chatal gant ar warded, ec'h erruas ur vandennad all a sklaved. E-pad an noz e labourfent ouzh skleur un nebeud

lutigoù. Ne oa ket amzer da goll. Mall bras e oa echuiñ ar bez a-raok ma varvfe an ozac'h-meur !

Un hanter lev bennak diouzh ar grugell edo kamp ar meuriad, war ur gompezenn izel a-zioc'h ur stêrig. A-bell e wele Amir anezhañ, ti-prenn an ozac'h-meur, laboù ar sklaved, lokennoù ar warded... Kent erruout eno, e tremenjont hebioù da stalioù an artizaned. Ur gwir gêriadenn evit ar c'hoved, ar wialerien, ar wiaderien, ar boderien... Da gentañ edo ar c'hovel, un ti savet gant mein, div forn enni, unan vras evit an arem, eben bihanoc'h evit labourat an aour hag ar c'houevr. Eno edo Naïm, kenderv Amir, o labourat. Saludiñ a reas hemañ anezhañ en ur vont hebiou d'ar c'hovel. Yaouankoc'h egetañ e oa Naïm. Ur paotr krenn e oa anezhañ, moan ha gwevn, kroc'hen rous alaouret dezhañ, blev du ha berr rodellet. Eveltañ e oa mesaer deñved e menezioù Adrar. Eveltañ e oa bet skrapet eno gant gwarded ar meuriad-mañ. Er penn kentañ e oa bet glac'harus bras e vuhez, harluet pell diouzh e vro. En em gavout en ur vro yen, leizh ha teñval. Eñ hag a oa bet desavet dindan an heol tomm. Ha bezañ hualet bremañ ha gwallgaset gwashoc'h eget un aneval. Da zeñved ha givri e vro ne veze ket graet ken gwazh ha ma veze graet d'ar sklaved er vro-mañ. Piv e oa ar vistri-se 'ta, tamm truez ebet enno ?

Bremañ e oa un tammig laouenaet e galon, alies e veze o c'hoarzhin hag o fentigellañ zoken. A-gevret

gant tri faotr all e laboure, renet gant ur mestr-gov. Un den kozh madelezhus e oa eus ar mestr-se. Truez en doa ouzh e vicherourien, o vezañ ma oa bet sklav eñ ivez. Ne lakae ket re a vec'h war o c'hein, klask a rae skañvaat dezho o buhez. Ur gwir arzour e oa anezhañ. Bravigoù a rae gant aour ha kouevr, da vezañ dougenet gant ar pennoù-bras, pe da vezañ gwerzhet d'ar meuriadoù all pe c'hoazh da vezañ lakaet e bez ar re varv. A-zevri edo, d'ar mare-mañ, evit peurechuiñ troioù-gouzoug, brec'h ha gar. Hag an oberenn souezhusañ ha kaerañ, ur c'harr bihan o tougen an heol. Er bez e vefe lakaet gant korf an ozac'h-meur evit e gas d'ar bed all.

Naïm hag e dri c'henseurt a durgne armoù gant arem. Kemmesket e veze an douar-staen gant kouevr, daou zanvez hag a oa ret lakaat degas a-bell vro. Soñj en doa Naïm, pa oant o tont d'ar vro-mañ, bezañ gwelet kargañ douar-staen er vag. E-giz kalet e oant. Er c'hovel e veze devet an douar-staen-se gant tan keuneud tomm-berv. Neuze e veze dispartiet an danvez prizius diouzh an douar didalvez, kemmesket goude-se gant kouevr ha teuzet adarre war an tan, da grouiñ an arem. Tanav-kenañ, da zour koulz lavaret, ez ae an arem-se. E moulloù pri poazh kalet e vez beret an dourenn arem, evit ober binviji brezel hag hemolc'h, kontilli, klezeier, goustilhoù, begoù goafoù. Binviji labour a veze graet ganto ivez, pili, filzier, falc'hier, freier, sternajoù evit ar c'hezeg... Pa vezent yenaet

ha kaledet e vezent tennet diouzh ar moullou, lamet o barv diwarno, lufret ha lemmet.

Dre guzh, hep gouzout d'ar re all, en doa turgnet Naïm un nebeud binviji brezel, kleze, goustilh, beg goaf, evit kas gantañ ha gant Amir pa dec'hfent kuit eus ar c'hamp milliget-mañ evit distreiñ d'o bro. En ur c'horn distro en doa o skoachet mat. Ur sell a reas ouzh Amir o tremen gant an tropellad sklaved. Ur sell hag a dalveze e oa tost echu gantañ sevel an armoù. Prest e oa d'o c'has gantañ pa vefe lavaret pegoulz ha penaos gant e genderv.

Larkoc'hik eget ar c'hovel edo ar boderezh. Un ti graet gant mein ha pri. Ur forn a oa en e greiz, glaou-bev o teviñ war an oaled anezhañ. Korzennoù pri en-dro d'an oaled-se a zegase c'hwezh da lakaat an tan da greskiñ. Diouzh un tu edo ar boderezh evit podezoù ha plajoù ar vuhez pemdeziek, graet difrae ha gros a-walc'h. Div blac'h yaouank a oa oc'h ober al labour-se, renet gant ur vaouez koshoc'h. Meratet e veze ar pri gleb, lakaet da dreñ war un turgn koad ha roet stumm al lestr, pod pe blad, gant an daouarn. Flouret brav e veze al listri a-raok bezañ lakaet da boazhañ e-touez an etivi-tan. Podoù gouzoug hir da lakaat evajoù, plajoù, podezoù, skudelloù evit ar boued pe traoù all.

En tu all d'ar forn-se e oa un oaled vihanoc'h evit poazhañ podezoù kalz finoc'h, tresadennoù garanet enno. Da vezañ lakaet e bezioù ar re varv e oant graet pe da vezañ profet da veuriadoù all.

Pep meuriad en doa tresadennoù disheñvel war e boderezh. Pep hini anezho o klask ober bravoc'h eget ar re all. Ur vaouez yaouank eo a rae al labour-se. Ur gwir arzourez e oa anezhi, bet laeret ivez en he bro, e reter Europa, brudet evit an arzoù-kaer.

Fati a oa unan eus ar poderezed yaouank. Ur plac'h zu, bras, mistr ha korfet-kaer. Un dremm vrav dezhi, daoulagad teñval, blev damhir, muzelloù bouedek. Sonn he divronn, moan he dargreiz, hir he divhar, flour ha lufus he c'hroc'hen. Laeret e oa bet e Bro-Afrika ha degaset d'ar vro-mañ asambles gant Amir ha Naïm. D'ar sell kentañ e oa bet flemmet o c'halon, dezhi ha da Amir. Tro o deveze d'en em gavout asambles o-daou da-geñver ar prejoù. Ne gomzent ket an hevelep yezh. O daoulagad avat a gomze ar memes hini. Dre laer ec'h en em flourent, pokat an eil d'egile a-wechoù. En noz koulz hag en deiz ec'h hunvrent an eil gant egile. Dre guzh en doa kinniget Amir dezhi tec'het kuit asambles eus ar vro-mañ. Ha distreiñ d'o bro. Abaoe an devezh-se ne oa netra all ebet war o spered. Mont en-dro d'ar gêr, pep hini gant e garantez.

Estreget poderezh e rae ar merc'hed yaouank paneroù gant gwial. Pell e veze ar podezioù o poazhañ, darev dezho ober ul labour all da c'hedal. Gwialerezh ! Paneroù, boutegi, manikinoù a dalveze da lakaat traoù enno, ed, legumajoù, mezer ha meur a dra all. Dre guzh e wiale Fati ur manikin, ur baner vras da lakaat ouzh ar c'hein. Enni e c'hellfent lakaat